

SONIOU BREZONEK***Ar Pilhaouer*****DISKAN**

*I'oei foei, foei d'am zammik Aotrou
Gant e stsup hag e bilhou !*

Ma zad en deus va dimezet
Da eur flerius pilhaouer ; (bis)
En Lokeffret ez eo ganet
E Komanant Toul-al Laer.

An devez warlerc'h e eured,
E oa foar e Landerne,
Ha ma lapous, prim dihunet
A ya'r meaz eus e wele.

Draillha ra eun hanter Bater,
Tana ra e gorn butun ;
Jis-krouga ra e grog-poezer ;
Setu hen war hent-Sizun.

Pa oa an hanter-noz sonet
En iliz vras ar Fouille,
Me oa intanvez glac'haret
Ma unan bars ma gwele.

Mont a ra d'ar vilin-paper
Gant eur zac'hadig pilhou,
Kalz buhanoc'h evit eul laer,
Rak preset eo an daelou

Pa'n deus kavet Kamaraded
Ebarz eun davarn bennak,
Meur a vanne en deus evel
'Vit lakat e gof distag.

Ha pa zistro d'ar gomanant,
Raktal e sav eun tamm Krog :
E pelec'h eo et da arc'hant ?
Me gred emaint en ez kof !

Ma Yannik pa'z a d'ar foariou,
A ve dalch'mad mezo dall,
Tost e oa da goll e vrugou,
En Montrou'es, an de-all.

Ma Yannick a zo eun otrou,
E dog war goste e benn,
Ha mar sellfec'h ouz e vrugou
E wellec'h tam e groc'hen.

Pa ve pignet war e azen
Ictouez e dammou pillhou,
Ivel eun impalaer romen

Kousk-Breiz-Izel**DISKAN**

Kousk, Kousk, Breiz-Izel bro dispar,
Setu an noz o tont war an douar ;
Kousk, Breiz-Izel, bro ken mat
Trouz ar mor vras a zav d'az luskellat

An heol a zo kuzet, setu echu an de ;
Me glev ar c'hloc'h o tintal an Ave.

C'houez-vad an ed e bleun hag allan
[alaouret
War ar meziou gant ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gân o testum o loened,
Gwersiou Breiz-Izel n'int Ket c'hoaz-Kollet

En traoniennou didrous me glev kân an
[costig ;
Telennor-noz, sonit flour ha dousik,

'Us da Vreix o skedi an nenv steredennet
A lar'z eus eun Doue ouz hor c'haret.

An nep ac'houezbemdez ec'hounid e repoz
D'en dud vad Doue en deus graet an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greis kalon m'ho
[kar,
Bro all ker haer n'eus ket war an dour.

(J. Maréchal.)

BRO GOZ MA ZADOU

(KAN BROADEL)

Ni, Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro !
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro ;
Dispont 'kreiz ar Brezel, hon tadou ken mad
A skuilhas eviti o gwad.

GWECHALL HA BREMANWar don : *Ar-Durzunel.*

1

Gwechall en Bro Breiz Izel, yez kör ar Vretoned
Ar Brezoneg enorus, gant an oll oa komzet
Breman siwaz e weller kalz ar Vretoned fall
O tilezel o yez koz evit hini Bro c'hall.

2

Gweach all ar vugale war barlen o mammo
A zeske ar brezoneg yez karet o zado,
Breman mammo Breiz-Izel, siwaz eul lod anhê,
Zo troet gant ar galleg, Pebeuz mez evitê

3

Gweach all ar yaouankiz ébarz an eureujo
A gane en brezoneg gwerzio kör a sonio,
Breman ez eo en galleg et tioront o geno
Vit kanan zonio Pariz kalz anhê hadurio.

4

Gweach all goz ar Vretoned, forz plec'h e valeent
Dirak an oll int lorzh'hus brezoneg e komzent,
Breman dirak an estren e weller bretoned
O tiskoell lorzh' braz enhê penoz int galleget

5

O ma c'henvroïz karet perak ta kement-ze
Daoust ha maro' ve 'no kreiz an tan a garante
A garante vit o Pro. körän hini zo 'r bed
Karante vit o yez koz ar c'hossan ve komzet.

6

Biryiken kentoc'h mervel vit plegan d'an estren
Dirak oll plobo ar bed, savomp ivé hon fenn,
Laromp d'ê a vouez huel, penoz ar Vretoned
O deuz evel ar re all droët d'o vlass war ar bed.

7

Ma Yannik pa'z a d'ar foariou,
A ve dalc'hmad mezo dall,
Tost e oa da goll e vragou,
En Montroulez, an de-all.

Ma Yannick a zo eun otrou,
E dog war goste e benn,
Ha' mar sellfec'h ouz e vragou
E wellec'h tam e groc'hen.

Pa ve pignet war e azen
Ictouez e dammou pillhou,
L'vel eun impalaer romen
Ez eo berr en e gomzou.

Pa zeuio ar c'hz er vro-ma,
Da derri an dimeziou
Me a ielo, en eur gana,
Pell deus potred ar pilhou.

Pa zeuio karrig an Ankou
L'ober e dro er vro-ma,
Me a gerzo war e roudou
Hag e bedo d'hen samma.

L'a'z ai an Ankou da rida
Toull va flerius pilhaouer,
Me ziredo d'hel lavaret
E komantan Toull-al-Laer.

Red vo komz d'an otrou person
Eus ar paour ker pilhaouer,
Vit ma kano al Libéra,
Hag, ouspen, al Lip-e-rer.

BRO GOZ MA ZADOU

(KAN BROADEL)

Ni, Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro !
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro ;
Dispont 'kreiz ar Brezel, hon tadou ken mad
A skuilhas eviti o gwad.

DISKAN

O Breiz, ma Bro, me 'gar ma Bro
Tra ma vo 'r mor 'vel mur 'n he zro
Ra vezo digabestr ma Bro !

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,
N'eus bro all a garan kement 'barz ar bed.
Pep menez, pep traouien d'am c'halon zo ker ;
Enne 'kousk meur a Vreizad ter !

Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv ;
N'eus pobl ken kalonek a-zindan an nenv,
Gwerz trist, son dudius a ziwan eno.
O ! Pegen kaer ec'h out, ma Bro !

Mar deo bet trec' het Breiz er brezeliou braz,
He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz ;
He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz.
Dihunet ou breman ma breiz !

Karante vit o yez koz ar c'hossan ve komzet.

6

Birviken kentoc'h mervel vit plegan d'an estren
Dirak oll plobo ar bed, savomp ive hon fenn,
Laromp d'ê a vouez huel, penoz ar Vretoned
O deuz evel ar re all droët d'o vlass war ar bed.

7

Penoz fell d'imp da viken derc'hel d'hon Brezoneg
Ra vo disket er skolio war 'n dro gant ar galleg !
Huchomp a bouez hon senno. Bevet hon Breïz-Izel !
Bue hirr d'it te yez kez, na n'hellez ket mervel.

Louis MORICE (Penn Dero).

Guingamp, Imprimerie ANGER-ROUQUETTE

